

An Intaonv eternal

Son a chiz koz
Var eun ton kernevod.

1

Yan Goz dek guech a zimezaz
Tranlardireno
Ha dek guech intaonv e chomaz
Tranlardira lanla
Tranlardireno

2

O vont d'an aot da c'houileta
E varvaz he vaouez kenta.

3

O vont d'ar park da blanta viou,
Marvet eun all : hag a ra diou !

4

O klask diverrât he fri re-hir
Marvet eun all : hag a ra teir !

5

O fourr' he fenn en eur picher
Marvet eun all : sétu peder !

6

O testum moget d'ober tremp
Marvet eun all : hag a ra pemp !

7

O tougen eun ti var e breac'h !
Marvet eun all : hag a ra c'hueac'h !

8

O klask sutal gant e dourn kleiz
Marvad eun all : hag a ra seiz !

9

Oc'h en em c'hourin euz eur bleiz
Marvet eun all : hag a ra eiz !

10

O klask lounka eur vezen skao
Marvet eun all : hag a ra nao

11

O planta pour en eur garrek
Marvet eun all : hag a ra dek !

PAOTR TRÉOURE